



Maîtrise d'ouvrage déléguée

**SemBreizh**  
ACTIVATEUR DES TERRITOIRES DE BRETAGNE

# LETTRE INFO CHANTIER

LIZHER-KELAOUÏÑ CHANTER - LA BANII DU CHANTIER

# 1\_Décembre 2021

## LYCÉE DIWAN - CARHAIX-PLOUGUER

La Région Bretagne est propriétaire des locaux des 115 lycées publics bretons. Elle investit, chaque année, près de 100 M€ pour moderniser et entretenir ce patrimoine afin d'offrir un cadre de vie agréable et adapté aux lycéen-ne-s et aux équipes qui les entourent.

### DES BÂTIMENTS RÉNOVÉS DANS UN ESPACE REDESSINÉ

À proximité immédiate du château de Kerampuilh fraîchement restauré par la Région Bretagne, le lycée Diwan est, à son tour, l'objet d'un investissement important de la part de la collectivité régionale. Pour faire face à la croissance des effectifs, qui ont plus de doublé au cours des 20 dernières

années, les bâtiments B2 (ancien internat) et B3 (administration, externat) vont être entièrement rénovés et reliés entre eux par un nouveau parvis et des espaces paysagers. Un agencement qui reconfigure une partie de l'établissement.

#### Performance et esthétique

L'opération, conduite par SemBreizh, consiste à ne conserver que la coque des bâtiments B2 et B3. À l'intérieur, l'ensemble des espaces sont redessinés quand, à l'extérieur, les façades bénéficient d'une nouvelle isolation recouverte d'un bardage en bois foncé (douglas).

Les travaux d'isolation et le renouvellement des menuiseries extérieures contribuent à l'amélioration des performances énergétiques de l'ensemble. Qui plus est, des lames de bois verticales viennent jouer un rôle de brise soleil pour éviter qu'il ne fasse trop chaud aux beaux jours.

#### Un accueil et des circulations revisités

Si la rénovation des bâtiments B2 et B3 constitue le noyau de l'opération, les aménagements extérieurs et les liaisons créées entre eux contribueront fortement à reconfigurer l'établissement. En lieu et place des stationnements actuels, un parvis et un espace paysager seront aménagés sur deux niveaux et deviendront une place centrale pour les lycéen-ne-s, un lieu de passage mais aussi de rencontre et de pause. Que l'on soit dans les bâtiments B2 ou

B3, cet espace paysager sera omniprésent et pourra être aperçu depuis les halls, depuis la circulation desservant l'espace scientifique au 1<sup>er</sup> étage du B3, depuis le CDI situé dans le B2...

Outre l'espace scientifique, le bâtiment B3 est principalement destiné à l'accueil des fonctions administratives, quand le bâtiment B2 abrite des salles de classe, le CDI, des salles informatiques, la salle de musique...



© Emmanuel Pain

« La Région Bretagne est déterminée à vous offrir de bonnes conditions d'apprentissage et de travail, à vous, nos jeunes lycéen-ne-s, mais aussi aux équipes enseignantes et aux agent-e-s qui œuvrent, chaque jour, à vos côtés.

Parallèlement, nous nous sommes engagés à œuvrer pour le développement des langues de Bretagne.

Aussi, après avoir ouvert un 2<sup>e</sup> lycée Diwan à Vannes en septembre dernier, nous entamons un vaste chantier de modernisation du lycée de Carhaix. Il permettra aux élèves, toujours plus nombreux, d'évoluer dans un cadre confortable, sécurisé et performant.»

Loïc Chesnais-Girard,  
Président de la Région Bretagne



À gauche : Le bâtiment B3 recouvert de son bardage en bois foncé et ses coursives ouvre sur le parvis minéral et l'espace paysager.

Ci-dessus : Vue de la façade Sud du bâtiment B3

© Guillaume Appriou Architecte

## DES TRAVAUX EN SITE OCCUPÉ

Mener des travaux tout en assurant le fonctionnement d'un lycée en période de cours n'est pas chose aisée. Ainsi, afin d'assurer la continuité des enseignements, les travaux sont menés par phase, ce qui permet de ne neutraliser, successivement, qu'une partie des bâtiments. Dans un premier temps, les travaux por-

teront sur le bâtiment 2. Actuellement inoccupé, il pourra accueillir, à l'issue de sa restauration début 2023, les salles d'enseignement du bâtiment 3 qui pourront, à leur tour, faire l'objet de travaux. Parallèlement, les travaux d'aménagement extérieurs seront menés pour créer le nouveau parvis et les liaisons entre les deux bâtiments.


### Tous acteurs du chantier

Des moyens conséquents sont prévus pour réduire les désagréments (bruits, poussières) et pour assurer la sécurité des usagers mais ces nuisances ne pourront toutefois pas être totalement évitées. Aussi, les efforts consentis par chacun contribueront-ils au bon déroulement

du chantier : réduction des nuisances et sécurisation du chantier de la part des entreprises, réorganisation continue des espaces par le lycée, compréhension et respect des consignes de sécurité de la part de tous, professionnels, élèves, personnels éducatifs et techniques.

## UN PROJET EN PLUSIEURS PHASES : CALENDRIER

Les travaux portent sur les bâtiments B2 & B3 et leur liaison paysagère



#### Phase 1 - d'octobre 2021 à mars 2023

- démolition des galeries de liaison vers le service de restauration (B4)
- restauration du bâtiment B2 et début des aménagements extérieurs

**Printemps 2023** - emménagement du bâtiment B2 qui accueillera, provisoirement, l'administration

#### Phase 2 - de mars 2023 à février 2024

- restauration du bâtiment B3 et aménagements extérieurs

**Hiver 2024** - emménagement du bâtiment B3

#### Phase 3 - hiver 2024

- finalisation des travaux définitifs du bâtiment B2 et des espaces extérieurs

### Les intervenants

Maitrise d'ouvrage : Région Bretagne

Maitrise d'ouvrage déléguée : SemBreizh

Maitrise d'oeuvre :

Architecte mandataire : Guillaume Appriou Architecte - Plouguerneau (29)

Architectes associés : Madec Architectures - Plérin (22)



### Favoriser la biodiversité et réduire la pollution lumineuse

Outre la sobriété énergétique, le projet s'attache également à favoriser le développement de la biodiversité avec des espaces paysagers composés de pelouses mais aussi de prairies comprenant des semis variés (trèfles, pâquerettes, véroniques...) qui sont autant de refuges pour les insectes pollinisateurs. L'éclairage naturel est par ailleurs privilégié et, afin d'éviter la pollution lumineuse en phase de pénombre, seuls les itinéraires adaptés aux personnes à mobilité réduite sont éclairés par des bornes, des candélabres et les plafonniers des coursives.

### Le saviez-vous ?

Les bâtiments aujourd'hui occupés par le lycée Diwan étaient, jusqu'à la fin des années 90, une maison de retraite composée essentiellement de petites pièces à usage de chambres avec salles d'eau.

En 1999, plusieurs opérations de travaux, auxquelles la Région Bretagne a participé financièrement au côté de la ville, ont été entreprises pour adapter les locaux. Le bâtiment B3 a alors subi une première transformation pour accueillir des salles d'enseignement, le service de restauration (bâtiment B4) et l'internat des filles (B1) ont été rénovés. Les garçons avaient investi le centre d'hébergement. Le bâtiment B2, pour sa part n'était plus utilisé. Et, Pour faire face à l'afflux d'élèves, des bâtiments modulaires ont par la suite été installés.

### Les chiffres du projet

SURFACE RÉNOVÉE :

2200 m<sup>2</sup> (B2 : 975 m<sup>2</sup> / B3 : 1304 m<sup>2</sup>)

COÛT DE L'OPÉRATION :

4 700 000 € TTC toutes dépenses incluses dont 3,9 M€ de travaux (valeur 07/2020)

DURÉE DU CHANTIER :

28 mois (hors finitions)

RÉGION BRETAGNE  
RANNVRO BREIZH  
REGION BERTÈGN





Maîtrise d'ouvrage déléguée

**SemBreizh**  
ACTIVATEUR DES TERRITOIRES DE BRETAGNE

# LETTRE INFO CHANTIER

LIZHER-KELAOUÏÑ CHANTER • LA BANII DU CHANTIER

# 1\_Kerzu 2021

**LISE DIWAN - KARAEZ**

Perc'henn eo Rannvro Breizh war savadurioù ar 115 a liseoù a zo e Breizh. Bep bloaz e laka tost da 100 M€ evit modernaat ha delc'her ar madoù-se e stad vat abalamour da zegas un endro bevañ brav hag aes d'al liseadezed, d'al liseidi ha d'ar skipailhoù a vez war o zro.

## SAVADURIOÙ NEVESAET EN UL LEC'H ADKEMPENNET

Tre e-kichen kastell Kerampuilh nevez-adkempennet gant Rannvro Breizh emañ al lise Diwan, a vo lakaet un tamm mat a arc'hant evit adkempenn anezhañ ivez gant ar strollegezh rannvroel. Aet eo niver al liseidi war greskiñ, ouzhpenn div wech muioc'h e-kerzh an 20 vloaz diwezhañ,

### Efedusted ha neuz

Kaset eo al labourioù da benn gant Sem-Breizh abalamour da virout korf ar savadurioù B2 ha B3 hepken. Adstummet eo an holl salioù en diabarzh hag, evit an diavaez, lakaet ez eus traoù nevez da zifuiñ an talbennoù, goloet gant bardaj koad teñval (sapr-Douglas).

### An degemer hag ar monedone adwelet

Ha pa'z eo pennabeg al labourioù nevesaat ar savadurioù B2 ha B3 e vo kempennet an diavaez hag ar monedone etrezo, ar pezh a vo pouezus-bras evit adaozañ al lise dre vras. E-lec'h ar plasoù parkañ a zo bremañ e vo kempennet ul leurgêr hag un takad glas war daou live hag a zeuy da vezañ evel ur blasenn greiz evit al lise-idi-adezed, ul lec'h tremen ha, war un dro, ul lec'h ehanañ hag evit daremprediñ an eil egile. Pe e vefe an dud er savadur B2 pe er sava-

rak-se e vo nevesaat penn-da-benn ar savadurioù B2 (ar skol-lojañ gozh) ha B3 (melestradurezh, ti-diavaezidi) ha staliet e vo ul leurgêr nevez ha takadoù glas evit ober al liamm etrezo. E-giz-se e vo adstummet ul lodenn eus al lise.

Gant al labourioù difuiñ ha cheñch ar pezhioù munuzerezh diavaez e vez gwel-laet efedusted energetek ar savadurioù en o fezh. Ouzhpenn-se eo mat al lavnennoù koad a-serzh evit « terriñ » bannoù an heol, kuit a vezañ re domm pa vez kaer an amzer.

dur B3 e vo an takad glas-se ul lodenn eus o endro bepred pa c'hall bezañ gwelet ganto eus an halloù, eus al lec'h ma tremener evit mont d'ar salioù skiantoù en estaj 1añ e B3, eus ar greizenn teuliaouiñ ha titouriñ e B2...

Ouzhpenn ar salioù skiantoù eo graet ar savadur B3 evit ar velestradurezh dreist-holl, tra ma kaver salioù klas, ar GTT, salioù urzhiataerezh, ar sal sonerezh... er savadur B2.



© Emmanuel Pain

« Fellout groñs a ra da Rannvro Breizh degas un endro a-zoare evit deskiñ ha labourat deoc'h-c'hwï, hol liseadezed ha liseidi yaouank, hag ivez d'ar skipailhoù kelennerien ha gwazourien a vez o labourat bemdez en ho kichen. War ar memes tro hon eus gouestlet labourat evit diorren yezhoù Breizh. Rak-se, goude bezañ digoret un eil lise Diwan e Gwened e miz Gwengolo, omp krog gant ur mell chanter evit nevesaat al lise Diwan e Karaez. Evel-se e c'hall ar skolidi, a vez niverusoc'h-niverus a vloaz da vloaz, bezañ en un endro aes, suraet hag efedus. »

**Loïc Chesnais-Girard,**  
Prezidant Rannvro Breizh



A-gleiz : Ar savadur B3 goloet gant bardaj koad teñval hag an trepasoù ennañ a sko war al leurgêr vaenel hag an takad glas.

A-us : Ur gwel eus talbenn ar savadur B3 er Su

© Guillaume Appriou Architecte

## LABOURIOÙ EN UL LEC'H IMPLIJET BEPRED

N'eo ket aes kas labourioù da benn ha war ar memes tro lakaat al lise da vont en-dro bepred e-pad ar bloavezh-skol. Neuze, abalamour da zalc'her gant ar c'hentelioù evel zo dleet e vez graet al labourioù a-lodennoù, evel-se ne vez sac'het an traoù bep taol nemet en ul lodenn eus ar savadurioù, an eil war-lerc'h eben. Da gentañ e vo labourioù e B2. Ne vez

ket implijet er mare-mañ hag ur wech adkempennet da vat, e penn kentañ 2023, e vo staliet ennañ ar salioù kelenn a zo er savadur 3, a vo graet labourioù ennañ diwar neuze. War ar memes tro e vo kaset al labourioù en diavaez da benn evit kempenn al leurgêr nevez hag an tremen eus an eil savadur d'egile.


### An holl a gemer perzh er chanter

Graet ez eus strivoù bras kuit a gaout re a nozadurioù (trouez, poultrenn) hag evit surentez an implijerien, met n'hallimp ket chom hep tamm diaezamant ebet. Rak-se e vo da bep hini d'ober e lod abalamour d'ar chanter da vont en-dro evel zo dleet :

an embregerezhioù evit digreskiñ an nozadurioù ha suraat ar chanter, al lise evit adaozañ ingal implij ar savadurioù, an holl, micherourien, liseidi, kelennerien ha gwazourien, evit anaout ha doujañ d'ar reolennoù surentez.

## UR RAKTRES E MEUR A LODENN : DEIZIATAER

Sellet a ra al labourioù ouzh ar savadurioù B2 ha B3 hag an takad glas etrezo



#### Lodenn 1 - eus miz Here 2021 da viz Meurzh 2023

- diskar ar garidennoù da vont betek ar servij pretierezh (B4)
- adkempenn ar savadur B2 ha kregiñ da gempenn an diavaez

#### Nevez-hañv 2023 - kempenn diabarzh ar savadur B2 ma vo staliet ar velestradurezh da c'hortoz

#### Lodenn 2 - eus miz Meurzh 2023 da viz C'hwevrer 2024

- adkempenn ar savadur B3 ha kempenn an diavaez

#### Goañv 2024 - kempenn diabarzh ar savadur B3

#### Lodenn 3 - goañv 2024

- peurechuiñ al labourioù war ar savadur B2 hag en diavaez

### An obererien

Mestroniezh an oberiadur : Rannvro Breizh

Mestroniezh dileuriet an oberiadur : SemBreizh

Mestroniezh al labourioù :

Tisavour leuriat : Guillaume Appriou Architecte - Plouguerne (29) Tisavourien

kevelet : Madec Architectures - Plerin (22)



### Aesaat liesseurtes ar vuhez war al lec'h ha digreskiñ ar saotradur diwar sklêrijennañ

Ouzhpenn dispign an nebeutañ ar gwellañ a energiezh e klasker ivez aesaat da liesseurtes ar vuhez diorren war al lec'h gant takadoù glas : leton hag ivez pradennoù enno plant a bep seurt (melchon, tommheoligoù, louzaouennoù-santez-Veronika...) hag a vo mat evit an amprevaned-pollenañ.

Klasket e vo ober ar muiañ gant sklêrijenn an heol ha kuit a saotradur sklêrijennañ pa vo teñval, ne vo sklêrijennet nemet an tremenioù kempennet evit an dud dalc'het en o c'herzhed gant bonnoù, kantolorioù hag al lampoù-solier en trepasoù.

### Daoust ha gouzout a raec'h ?

Betek fin ar bloavezhioù 90 e oa ar savadurioù-se, lec'h m'emañ al lise Diwan hiziv an deiz, un ti retredidi ennañ salioù bihan dreist-holl, anezho kambreier gant pep a sal-dour. E 1999 e oa bet lañset meur a reuziad labourioù evit adkempenn ar savadurioù, gant sikour arc'hant ar Rannvro ha Ti-kêr Karaez. Da neuze e oa bet al labourioù kentañ war ar savadur B3 evit staliañ salioù-kelenn ennañ, ha nevesaet e oa bet ar servij pretierezh (savadur B4) ha skol-lojañ ar merc'hed (B1). Lojet e veze ar baotred en ti-degemer. Ne veze ket implijet ar savadur B2 ken. Ha goude-se e oa bet staliet savadurioù lem-laka abalamour ma oa kresket niver al liseidi.

### AR RAKTRES DRE AR SIFROÙ

GORREAD NEVESAET :

2200 m<sup>2</sup> (B2 : 975 m<sup>2</sup> / B3 : 1304 m<sup>2</sup>)

KOUST AL LABOURIOÙ :

4 700 000 € TTC en ur gontañ an holl zispignoù, 3,9 M€ en o zouez evit al labourioù (talvoudegezh d'ar 07/2020)

PADOUT A RAY AR CHANTER :

28 miz (hep kentañ ar peurgempenn)

RÉGION BRETAGNE  
RANNVRO BREIZH  
REJION BERTÈGN

